

Disput
Etre eur Vam hag e Merc'h,
Pehini a falis dezji demezji da eur Zoudard pe d'eur Martolod.

(229)

Var un ton joais.

Ar Vere'h.

Va mam, va demezji, me gar oll tud ar roue ;
Va mam, quit an drase, me a gar an arme :
Charmet eo va c'halon pa glévan tambourinou ;
Pa velan ar rejimanchou,
Anezjo emeus c'hoant
Da choas un den yaouanq.

Ar Vam.

Va merc'h, meurbet oc'h sot da zonzal en armes,
An dud a barlanto, ha chaegrin o pezo.
Hep e sonjot e drouc, sur e vezo lavaret :
Homa gant ar zoudardet
Hag an oll dud a vor !
Coll a rai he honor.

Ar Vere'h.

(230)

Comzet nep a garo ; haqêt emeus en speret
Laret an dud a vor ;
Ar re-ze o deus honor.
En istant ma o quelan, e rejouis va c'halon ;
Eno em a va mignon :
Anezjo emeus c'hoant
Da choas un den yaouanq.

Ar Vam.

Va merc'h, en amzer-mañ, n'estimer qet ar plac'het
A dal ma vent quelet
O Comz gant zoudardet,
Balamour d'o habit, pehini zo scandalus,
D'ar merc'het qen danjerus :

Disuallit oc'h honor
Eus an oll dud a vor.

Ar Ver'h.

(231) Va mam, an dud a vor a zo tout rejouiset,
Merdaidy, soudarded,
A gontant va speret,
He 'n em fize gent enno evit en un den souret,
Godiserien ar plac'het;
Anezo emeus c'hoant
Da choas un den yaouanq.

Ar Vam.

Va merc'h, me gafe quell dec'h caout un den a richer;
Bourc'his pe bayant,
Intaon pe den yaouanq;
List an oll dud a vor, c'hasait-y eus ho speret,
Pe e viot disprizet
Gant an oll plac'het all,
Ha laqet un den fal.

Ar Ver'h.

(232) Va mam, ar botret vras zo e servich ar roue,
Mar dint potret vaillant
E zeont insesamant
D'an arme; n'o goulen, ret e des aboisa,
N'o deus gard da rezista,
Hag anezo emeus c'hoant
Da choas un den yaouanq.

Ar Vam.

Va merc'h, ar zoudarded couls hag ar vartoloded
A ra rejouissans
Gant arc'hant ar roue Frans.
E fin o c'hampagnou erzeont d'an hostaliri,
Evit en em antreteni,
Da foullta o frusquin,
Va merc'h, oc'h eva quin.

Ar Ver'h.

Va mam, hag e ve quir ec'h effent peb a vanne

Erit en em recrei,
 O deus proaz hag anui;
 Pa vezont var ar mor, int expozet en danger,
 Ha da bep sort mizer,
 Anezo emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

Ar Yam.

Mar o pe bugale, va merc'h pa viot demezet,
 Soudard pe merdead,
 Ho rento mizerabl:
 En a yêlo er c'hampagn, hag e viot dilézet,
 Setu c'houi abandonet,
 Poan o pezo goude
 O vega ho fugale.

(233)

Ar Ver'h.

Hag em be bugale, va mam, mar vezont potret,
 Evel ma vint savet
 Ezint da zoudardet,
 Pe da verdañdi, da redez an armeou,
 Evel ma ya an troupon,
 Eus an arme emeus c'hoant
 Da choaz un den yaouanq.

Ar Yam.

Va merc'h, c'houi zo yaouanq, n'oc'h eus nemet pempzec vloaz,
 Abredic mat oc'h c'hoas
 Da g'emeret eur goas:
 Eun daou pe dri blavez e falfe din diferi
 E chomfac'h hep demezi;
 Neuze e ven contant
 E gemerfac'h ho c'hoant.

(234)

Ar Ver'h.

Va mam, an exercis, ar fibr, an tambourinou,
 An oll rejouisans a arme roue Frans,
 A laza va speret da garout soudarded,
 Hag ar vartoloded;
 Bremañ e renqan choas
 Eus an arme va goas.

Ar Vam.

Torit eta ho c'hoant, ha choazit ho fantazi,
Soudard pe vartolod,
Va merc'h, evit ho bot,
Pa zeo quis an arme a ra dèc'h rejousans,
Hag oc'h oll pasetans,
Triomp, gant cals a jom,
Hon diou : Vive le Roi.

(Vol. I, p. 229-234.)